

Le glaneur celtomane (ano ebed)

Kolladenn e vamm

pe

Moumoun e vamm

Un aotrou braz demeurez a Frañs,
Den a vadou, den a noblañs,
En-devoa eur mab euz ar gwella,
Penher yaouank c'hweh pe seiz vloa' ;
Paotrig beo braz ha korv greet mad,
Leun a spered hag a lagad,
Chantou poudeg¹, heb krina tamm,
Evel ar ro, ruz, gwenn ha flamm.
Karantezuz ha paotr seder,
Skiltr a vouez ha mestr kaozeer.
Gand nebeutoh a ziou mad
Eur mab a charme mamm ha ta.
Evel-se ivez e oa karet
Ar mab yaouank hag admiret.
Nag a-berz tad, nag a-berz mamm
Euz a netre n'en-dije blam²,
Lezet e oa da heuill e benn
Evel ma vez eur golladenn.

Un deiz koulskoude eh arruas
Tra na oa arruet biskoaz,
Ma rankas an tad kontrolia
E vab, hag hen humilia.

N'eus mar ebed Eskob ar vro,
O veza deut d'ober e dro
Evdi gweled e eskopti,
A ziskennas en o zi,
Ha gantañ kalz gompagnunez.
Tud a iliz ha tud a lez.

Gweled a reed war fas pep hini
Penaos ne oa ket dizoursi,
Dre ma tostae poent al lein,
Evid renka kemend a drein.
An daol a oa hir ha ledan,
Evelkent e oa re vihan
Evid galloud lakaad outi
Kemend-all a dud da zebri.

An aotrou, pa welas benkter³
A zistroas euz e benner
Hag a lavaras : « Ne vez ket prop
Lakaad euz taol gand an Eskob
Eur paotr divarv evel d'out-te,

¹ Chantou poudeg : ? (marteze : C'hoantou podeg)

² blam (galleg- ; tamall.

³ benkter : ?

Selll mad euz baro an dud-se,
Ha kê da leina, mar kerez,
D'ar gegin gand da vagerez.

Ar paotr, pa glevas kement-mañ,
N'eus ket kalz a bostur ennañ,
Ruz e teuas evel ar gwad
Beteg gwennou e zaoulagad ;
Komañs a reas da gunudal.
Prest e oa dija da yudal.

Ar vamm p'her helvas o tezoli⁴,
A zeredas d'he hoñsoli⁵.
Tao, emezi, te 'zo paotr-mad ;
N'eus forz petra 'lavaro da dad
Te 'pezo amañ eun daol vihan
Euz an hini⁶ e leini da-unan
Kalz gwelloc'h evid pa vijes
Euz taol gand ar gompagnunez.
Mad, emezi, savit raktal
Un daol d'ar paotr en traoñ ar zal,
Ha roit dezañ, ma vezo kontant,
Kement tra en-devo c'hoant.
Evel-se e teuas a-benn
Da lakaad peoh er golladenn.

Ar pez he-devoa lavaret
Hep koll amzer a oe greet.
Roet e oe dezañ da leina
Soubenn drempet, kig ha bara,
Ragout, rost, dizervij fin,
Ha da eva jistr ha gwin.

Eur haz briz a oa er zal
Tro-war-dro o treseal,
Hag a êsaas gand e droad
Sacha un tamm diwar e blad.
Ar paotr pa oa en humor fall,
Ne oa en gout da farsal,
Ha gand al loa ma oa o tebri
E skoas un taol war e fri.
Ar haz prim a yeas a-dreñv
Rag an taolig a oe krenn,
Ha ma n'en-dije kizet buan
En-dije daou koulz hag unan.
En keit ha ma'h hije e benn,
Ar paotr a gomzas evel-henn :
« It du-ze, emezañ, aotrou kaz
Da leina euz an daol vraz ;
C'hwi marteze a vezo prop

⁴ o tezoli : galleg ÷ o vantri.

⁵ : galleg : frealzi.

⁶ an hini : p'hini, e skrid orin.

En-tal va zad hag an eskob,
Deoh-hu, nebaon, e vezo greet plas,
Rag c'hwi 'zo baro war ho fas.

Evel ma komze war bouez e benn
E oe klevet ar brezegenn.

Ar c'hoarz a zavas euz an daol,
An oll a gave e oa drol ;
Beleien ha tud a justis,
Toud e kavent e oa isliz
En-divije ken abred
Ar mabig kemed a spered.

A-houde an tad hag ar vamm
Ne halljont pelloh debri tamm,
Kement o-devoa a blijadur
O kleved meuli o hrouadur.

Ar vamm a grogas en he faotr,
A roas kant pok war e jod,
Ha mar boa a-raog he holladenn,
Goude e oe he idol krenn.

Intañv al lochenn

1

Er bed-mañ nag aour nag arhant
N'o-deus biskoaz staget va halon ;
N'on nemed eur hêz peizant,
Evuruz e oan em hondision ;
Mez va freid karantezuz
Hirio a gollin, pebez anken !
Gwelet ha n'on ket malevuruz ?
C'hweh krouadur am-eus em lochenn.

2

D'ar houlz ma oa beo va fried,
E furnez a charme va halon ;
Va bugale, euz va hared,
A roe din koñsolasion ;
Beb eil lod e poken deze,
Un tad evurusoh na vo biken,
Dre o jestou tener bemde'
E oa evruz e-barz em lochenn.

3

Da vintin, pa'z an d'am parkou
Adarre da gomañs va devez,
E lezan va bugaligou
Euz va zi da gemerad evez,
Ha da noz, pa deuan en-dro,
Evid va distrei euz va anken
En em stardont oll war va zro,
D'am hoñsoli e-barz em lochenn.

4

Braz 'oa va laouenidigez
Pa vijen er gêr gand va ziad,
Bremañ pa welan va merh kêz,
An dour a deu war va daoulagad ;
Seblantoud a ra din bepred
Gweled he mamm dener em hichenn,
En desped d'am heuz diremet
On c'hoaz evruz e-barz em lochenn.

5

O ! ma hallfen hep kaoud mizer
Sevel ha deski va bugale !
Me a hallfe gand an amzer
Fortunia va merhig marteze ;
Neuze va faotred a vezo braz,
Barreg da labourad un dachenn,
Em hozni me a hello c'hoaz

Beza evruz e-barz em lochenn.

6

Evruz meurbed me 'n em gavo
P'o gwelin o hounid o bara,
Neuze pa deuo ar maro
Euz ar vuhez-mañ d'am delivra,
Va mignoned am enterro
Gand va freid pe en e gichenn,
Ha va bugale a ranno
Va zamm tiegez ha va lochenn.